

SKRIVADENN AN EMGLEV

D'ar Sadorn 15 a viz C'hwevrer 2003

Ul lizher evit Bernez

Brav eo an amzer, tomm n'eo ket met n'eo ket re yen. Avel n'eus ket, na glav. Petra goulenn muioc'h ? Emañ an aotrou Penneg dirak e di. Un ti bihan eo, un ti-plouz.

Fin skrivadenn ar CE

.....

E toull e zor emañ, e zaou zorn a-dreñv e gein. Tuchantik e vo kreisteiz nemet kard. D'an eur-se e tremen paotr al lizherioù, d'ar memes eur atav, nemet d'ar Sul. Labour Sul, labour nul.

Fin skrivadenn ar CM

.....

Ar c'hasour-lizherioù a vez dalc'hmat en e sac'h ul lizher bennak, pe ur gazetenn, evit Bernez (anv-bihan an den eo). Alies, siwazh, e vez faturennoù ivez : pellgomz, dour, gaz, tredan... Pep tra a rank bout paeet e koulz hag e kentel

Fin skrivadenn ar skolaj

.....

Bras eo ar pakad an taol-mañ : div gazetenn, teir faturenn hag ul lizher. Un timpr hollgaer a Vro-India a zo àr¹ ar c'hronnenn. Skrivet eo bet d'an driwec'h a viz Gwengolo, e Bombay, ha sinet Yann ha Sesilia, breur ha c'hoareg Bernez. Tost echu eo tro ar Meurvor Habask evit an daou lapous. Edan berr e vint er gêr en-dro.

Fin skrivadenn lise/oadourion

¹ "àr" pe "war" a c'heller skriv.